

CHANSON AN AMOUROUSTED

Chilaouit, ma mignonnet,
Chanson an amourousted
A zo gant eur c'hernevad vit an déio composet.

Amourousted zo eur guer
Hac a zo douç hà tener
Caus he da vil nec'hamant hag ive da vil mizer.

Pa vo an nos pe an de
Daou zen yaouanc a goste
Quent ma c'houlfeong doare he c'haruo gante.

Ar pot ar goze brao
Hac ar plac'h a deus foa.
Evit beza evurus na fot nemet eun dra.
Amourousted a ra dhe
Dimezi heb dale.

Pa vouing neve eureuget,
Vad a ra d'he n'em velet,
Casi na ra met unan an oac'h gag ar vreg.

Quen bras e ar garante
Ha quen bras an amitié
Neus an eil vit egule hag en nos hag en de,
He ra deze lavaret
Pell zo clefemp beza dimeet.

Tudo yaouanc, me ho ped,
Memes tra divoallet,
Liessoc'h zo dimezet vit a zo ezet.

Guelet a meump a vejou
Cals a chanchamanchou,
Er menajou e caver bep sort ambarrassou,
Pa zeu en tieguezou
Cals deus a bouponou.
Unan a c'houlen crampoës
Hac eun all galletes.

Eun all zo en he gavel ho clasq donet er mes.
Ar vreg so dre an ti
Vel pa ve etourdi,
Na neus den evit clevet reson vad ebet ganti.
Fachet e deus e fried
Adieu d'an amourousted.

Tud yaouanc, mar em c'hredet,
Laeait eves, diouallet,
C'houi he an evurussan tud a so voar ar bed,

C'houi so dre ar pardonniou
Ha dre an assembleou,
O tansal, o c'hebattal, o c'hevan taquennou.
Eun den yaouanc, mar gue fur,
So parfet e blijadur.

Hac a re so dimezet
An darn vuyan meus goelet
A vanque eun dra benag d'alc'hrad do evurusted.

Darn so hac a laer ar yalc'h
Ha darn all e ya war varc'h,
Re all a gar ar chopin, quen azvont me wawalc'h.
Tud yaouanc, mar dimeet
Choaset tud fur ha parfet.

PA HI LERER EN EUN EURED A HELLER AJOUTI

He neur dont da finissan
Souhaiti ferm a ran
Yec'het dan daou zen neve, chanç ha prosperite,

Men ho ped, camaradet,
Vit eur farç, ne fachet ket ;
Permettet e badinal en tre ar vignonnet.

Graç dimp da nem gavet c'hoas
Joas evel biscoas
Ben an de-ma pen eur bloa, ebars ar memes plaç,
Ho trinka gant ho goeren
Da yec'het ar poupon.

LENEINDRE.